

KANTIK

d'ar plac'h euruz Jeann d'Arc


TON NEVEZ.

Allegro à Mouvt. Marche.

C.C.




COUPLET.



DISKAN :

Saludomp oll, en deis ma benniget,
Hano Jeann d'Arc, plac'h euruz embannet ;
Euz barr an env, ra zifennno ar feiz,
En hor bro Franc, dreist oll var douar Breiz.



I

An env euz hor bro gant truez
D'on delivra c'hoaz eur vere'hez ;
Vel Judith, Deborra, Jaliel,
Jeanna a vo eur plac'h a vrezel.

II

E Domremy e zeo ganet
Euz tad ha mam santel meurhet,
Lagad Doue gant e vennos
A bare varnhi deis ha nos.

III

Anaout Doue hag e bedi
Abred e mam zeskas dezhi,
Kalon aour 'vit an aluzen...
Bemdez e clev an offeren.

IV

Er prajou o tioual denvet,
Moueziou en env e deuz clevet.
— « Jeann, lez da zenvet da beuri,
« Ha kers buhan da vrezelli.

V

« Dilez ar ger, kemer kleze,
« Dilez 'vit sikour ar roue.
« Ar Franc 'zo var nez mont da goll
« Ar Saoz e pep leac'h a ziroll.

VI

« Ar roue Charl 'zo e Chinon,
« Lavar dezhan kemer kalon
« Lavar dezhan e vo sacret
« E Reims dirag e soudardet.

VII

-- « Me n'on nemed eur plac'h dister,
« Penos ellin quitaat ar ger,
« Piou sclerijenno va spered,
« Piou va hencho, eal benniget.

VIII

Sant Mikaël a lavar dezhi :
— « Doue a bep tra gemer sourcei.
Mac'harit, Catel : diou santez
Da hencho var hent ar vuez.

IX

Kenavo, tad ha mam garet,
Kenavo, Ilis benniget,
Kenavo, va denvadigou,
Na glevin mui son o clemmou.

X

Ar roue Charl 'jommas nec'het
Pa glevas Jeann o lavaret :
« Roue, ganen c'houi vo bleinet
« Beteg Reims 'vit beza sacret.

XI

Da ger Poitiers ez eo casset
Dirag ar brassa doktoret.
Eun enklask piz var e c'homzou
A lavar : guir eo ar moueziou.

XII

Guelit Jeann gant hernaj guisket,
Var varc'h e penn e soudardet,
En e dourn a zo eur baniel
Varnezan skeud sant Gabriel.

XIII

En e c'hostez eur c'hleze bras,
Eur c'hleze dir varnan pemp croas ;
Caeroc'h capiten a vrezel
N'euz bet abaoue Sant Mikaël.

XIV

« Hastomp brema, a lavar Jeann
« Da zelvra ker Orléann
« Rak ar ger a zo kelc'het
« Gant ar Saoz Talbot milliget

XV

« Saillomp varnho, va mignonet
« Arabad deomp beza nec'het. »
— Da baotret Franc eo ar gounit
Ar Saozon spontet a dec'h kuit.

XVI

Var e marc'h du, Jeann zo savet,
Varlec'h ar Saoz e sko bepret,
E Beaujency hag he Pate,
Jeann zo laket treac'h gant Doue.

XVII

En Iliz Reims, Charl 'zo sakret,
Evel Clovis eo curunet.
Na caera devez evit an oll,
Mes evit hor gwerc'hez dreist-oll.

XVIII

Siouaz ! an Ifern miliget,
A eneb Jeann zo dirollet,
Guerzet gant eun den digalon ;
Jeann a zo taolet er prison.

XIX

E ker Rouan ez' eo barnet,
Ha barnet da veza devet ;
Gant barnerien ha testou faoz,
Touellet gant arc'hant Bro-Saoz.

XX

Var eur blassen, e kreis Rouan,
C'houeset a zo eun tantat tan ;
Var ar bern keuneut enaouet,
Ar paour keaz Jeann a zo savet.

XXI

Var e daoulin, araok mervel
Klevit comz ar verc'hez santel.
— « O Dreinded sakr o pet truez,
« Truez ouz o servicherez.

XXII

« Ha c'houi, moueziou, va zikourit
« Euz an enkreiz va diouallit
« Pardon, Jesus, d'am bourrevien
« Sellaouit, Jesus, va feden.

XXIII

Ar verc'hez iaouank 'zo maro
Maro 'vit savetei hor Bro.
He c'horf devet 'kreis ar flammou
He ene a nij d'an envou.

XXIV

O gwerc'hez Jeann, gwerc'hez dispar
Ra vezo bras en env o cloar,
O pedi brema, deis ha nos
Ra vimp ganeoc'h er barados.

IMPRIMATUR :

le 10 Avril 1909.

Em. FLEITER.